

An ever Kafe

Gavotenn ar Feunetenn Wenn

An deiz all e oan bet e pardon Feuntenn Wenn
'Samblez gant ma mignoned 'vedon deut o pourmen
C'hoari kilhioù pe kartoù, kontañ kaoz gwir pe gonchoù

Ha da seizh eur e oan c'hoazh gant ma c'hamaraded
Oc'h evañ n'eo ket staot kazh, met ur banne kafe
Kalz a dud oa o c'hoari e-barzh an osteleri

O servijiñ 'barzh ar sal 'm eus gwelet ur plac'h koant
He blev, he mouezh, he fri, he zal, toud 'n dra-se oa charmant
Klasket 'm eus kaozeal ganti, 'm-boa ket ken c'hoant da c'hoari

Ha ken charmant e oa hi, c'hoant kaout 'nezhi dirazañ
Goulenn 'm eus graet diganti muioc'h kafe 'vit rezon
Na marteze ugent banne e-mode-se **e m** eus evet

Na marteze ugent banne e-mod-se 'm eus evet
Hag e-pad un noz goude 'm eus ket gellek kousket
'Pad an noz n'am-eus ket kousket ne oan ket bet direnket

'Pad an noz m-eus ket kousket n'oan ket bet direnket
Kar me oa gant ma Janed dija dre ar spered
Ha pa sone unnek eur em eus neuze **soñjet**

Ha pa sone unnek eur 'm eus neuze divizet
Em bije plijadur vras antronoz d'he gwelet
Ha pa sone peder eur em boa me dija **soñjet**

Ha pa sone peder eur em boa dija **soñjet**
Em bije me an enor da vont da gêr d'he goulenn
Ha pa sone pemp eur hanter **pell** war an hent e oan bet

Ha pa sone pembeur hanter, war an hent e oan bet
Aze 'm eus bet ar gwalleur n'em eus ket he c'havet
'Doa kemeret ar c'harr-nij 'vit mont d'ar gêr, da Bariz

'Doa kemeret ar c'harr-nij 'vit mont d'ar gêr, da Bariz
En ur lezel ac'hanon o tiskanañ diouzh va c'hiz
En ur lezel ac'hanon o tiskanañ diouzh va c'hiz

E galleg

L'autre jour, je suis allé au pardon de la Fontaine blanche
Avec mes amis, j'étais venu pour me promener
Pour jouer aux quilles, aux cartes, pour bavarder...

Et à sept heures du soir j'étais toujours avec eux
A boire, non pas de la pisse de chat, mais café sur café
Et à jouer dans le bar avec une foule de gens

C'est alors que j'ai vu une jolie fille qui faisait le service
Ses cheveux, sa voix, son nez, son front étaient si beaux
Que j'ai essayé de lui parler ; l'envie de jouer m'avait passé

Elle était si belle que je ne voulais plus la quitter des yeux,
Alors je lui ai commandé du café plus que de raison.
Et ainsi, j'en ai bu peut-être une vingtaine de tasses

Et ainsi, j'en ai bu peut-être une vingtaine de tasses
Aussi, la nuit qui a suivi, je n'ai pas pu fermer l'oeil
Je n'ai pas dormi de la nuit, mais ça ne m'a pas gêné

Je n'ai pas dormi de la nuit, mais ça ne m'a pas gêné
Car je me voyais déjà avec ma Jeannette.
Quand onze heures ont sonné je me suis dit

Quand onze heures ont sonné je me suis dit
Que je la reverrai le lendemain, je me sentais tellement amoureux,
Et quand quatre heures ont sonné, je me suis dit

Et quand quatre heures ont sonné, je me suis dit
Que j'aurai l'honneur d'aller chez elle lui demander sa main
Quand cinq heures et demie ont sonné, j'étais déjà parti.

Quand cinq heures et demie ont sonné, j'étais déjà parti.
Mais je ne l'ai pas trouvée, pour mon plus grand malheur
Elle avait pris l'avion pour rentrer chez elle à Paris

Elle avait pris l'avion pour rentrer chez elle à Paris
En me laissant déchanter comme d'habitude
En me laissant déchanter comme d'habitude